

**Dizano : Dister**

## **Al louarn hag ar boh**

Jakaou Ar Boh, hudur ha treud,  
Hir e gerniou hag e vleo reud,  
Eul liou warnañ, liou al ludu,  
A grigne brug er Menez-Du.

Hag e termenas, 'n e gichenn,  
Alan Al Louarn, paotr dijen,  
Alan Al Louarn, paotr faro,  
Gwad ouz e veg hag e varo.

'Vidon, gand se n'on ket souezet,  
Pa oa 'tond deuz Restelouet,  
Taget gantañ kog ar Skouarneg,  
Ha yar velen Piton Horneg.

« Hasta, Jakaou, eme Alan,  
Bepred eta out<sup>1</sup> war al lann,  
Ha war ar raden hag ar brug :  
Ar boued-se, komper, a vag krug<sup>2</sup>. »

« Paour-kêz Alan, te 'lar a-walh,  
Rag te 'zo bemdez war da walh,  
Mez te 'laro 'vel a gari,  
E leh on stag, me 'rank peuri.

Ma flanedenn a zo kaled,  
Greet em-eus gwellañ 'm-eus gallet,  
Ha bepred e choman pinouz,  
Evel ma zad Loeiz ar Minouz. »

Ha Jakaou, war eur roh azezet,  
Hag e galon anoazet<sup>3</sup>,  
A ouel, ken e red an daerou  
Hed-a-hed gand e varbouchou<sup>4</sup>.

« Ba ! 'me Alan, ro peuh, komper,  
Ha deus ganin-me da Gemper,  
Da di ma yontr, Ar Zah-C'hwiled,  
Bet 'm-eus kelou dond d'hen gweled.

Sav da vragou ha deus timad,  
Eno on-daou ni 'vevo mad ;

---

<sup>1</sup> out : emaout.

<sup>2</sup> krug : nebeud-tre.

<sup>3</sup> anoazet glaharet.

<sup>4</sup> e varbouchou : e varo.

En-dro da gêr, 'zo prajou dru',  
Ha kig en-skourr<sup>5</sup>, a-hed ar ru. »

Ha Jakaou a zeh e zaerou,  
'Lak eun tamm raden 'n e voutou,  
A dap e benn-baz, ha dioustu,  
A lar keno<sup>6</sup> d'ar Menez-Du.

Setu en hent an daou gomper,  
Ha pres warne, etrezeg Kemper ;  
Tomm an amzer ha broutahet,  
Alan ha Jakaou 'deus sehed.

Hag er vro leh ma tremenent,  
Ne oa ket eur poull war an hent,  
Ne oa penn-da-benn, 'med mine<sup>7</sup>,  
A-hed da hed gand Bro-Gerne.

Pa oant erru tost da Vrieg,  
'Tal ostaliri Ar Frieg,  
Gand ar zehed ne badent ken,  
Hag en eur puñs i o tiskenn.

Goude boud greet beb a gorvad,  
Ha bet 'n em zistanet ervad :  
« N'e' ket a-walh, eme Alan,  
Red e vo mond e-mêz ahann.

Sav war da dreid a-dreñv, Jakaou,  
Ha 'n eur ober eur hrog pe daou,  
Gand gwall da gein<sup>8</sup> me a grapo,  
Hag e-mêz neuze me 'lampo.

Pa vin e-mêz, 'n eur redadenn,  
Me 'yey da dapoud eur chadenn,  
En-dro d'az koug 'vo tremenet,  
Ha prim e-mêz e vi tennet. »

Heb mond nag hirroh na brroh,  
D'ober eur skeul laket ar boh,  
Ha... bourdadip<sup>9</sup>... eun, daou ha tri,  
Alan e-mêz evel c'hoari.

Ha, 'n e goaze war ae sichenn,  
Da Jakaou e tenn e lañchenn :  
« Keno, Jakaou, keno Jakez ;

---

<sup>5</sup> en-skourr : war ar skourrou, a-istribill.

<sup>6</sup> keno : kenavo.

<sup>7</sup> mine : menez.

<sup>8</sup> Gand gwall da gein : war da gein.

<sup>9</sup> bourdadip : euz "bourda" ?

Ne ran ganit 'med eur gleukez.

'N en denn alese ma karez,  
Me 'ya da retorn da Garhêz ;  
Pa welin tud tud ar menezioù,  
Me 'rey deze da hourhemennou. »

Diwallit ouz ar honter kaer  
A lare deoh moned en kêr ;  
Eet d'ar hêriou neb a garo,  
C'hwi, Bretoned, chomit 'n ho pro.